

# DEZRVELLOÙ AN DUD KENFINET RÉCITS DE CONFINÉS

*Ma jardin kloz  
A-bep tu e sellan  
Mogerioù a welan  
Ledanomp war al leton  
C'hwezh vat ar bleunioù o tont  
Kan al laboused  
Hag ar re nevez-ganet  
Ma spered a z'a da c'haloupat  
War vor, en oabl pe er c'hoad  
Ma ijin a zo ken ledan  
N'en deus ket dihan  
Met o sellout piz  
Se zo blaz ar frankiz  
Bez eus anevaled  
ar re se n'int ket kroufet  
un naer-vro  
o tont d'ober un dro  
ur viskoulenn pennglaoued  
kalvennig glas, pinted  
Mont eno gant ar vugale  
evit ober kalz traoù bemdez  
c'hoari bleiz, kuzh-kuzh  
pe sellout ouzh ar yar ruz  
D'an noz gant ur sac'h-kousket  
Evit sellout ouzh ar stered  
Aze atav traoù nevez  
Dreist eo va buhez  
Ma jardin kloz  
A zo evel ur baradoz*